



SALADENN AGRUM

Ur gelaouenn e
brezhoneg!!



Hentenn divyezhek
Skolaj Pierre Brossolette. Bruz
2022-2023
Niverenn 1

Anna, Abigail

Rekipe :Saladenn Agrum

Aozennoù:

- 1/2 pomelo - 1/2 orañjezenn
- 4 folenn Saladenn -Eoul olivez
- Un tammig kraksivolez -Gwinegr aouraval

Rekipe:

1) Gwalc'hiñ ha diwaskiñ ar saladenn ha dibluskiñ. Dibluskiñ an hanter oranjezenn hag an hanter pomelo. Lakaat a-gostez chuk an aouraval.

2) Diskenn un tamm chuk aouraval war ar saladenn pe fardañ ur gwinegrenn gant ar chuk-mañ. An eoul olivez, ar gwinegr agrum, an holen hag ar pebr ma 'z eus ezhom. Kinklañ gant kraksivolez.



[Recette de Salade d'agrumes \(journaldesfemmes.fr\)](http://journaldesfemmes.fr)

Geriaoueg :

- Aouraval : Agrume
- Gwinegr : vinaigre
- Kinklañ : décorer
- Holen : Sel
- Pebr : poivre
- Chuk : jus
- Gwalc'hiñ : laver
- Diwaskiñ : éplucher
- Kraksivolez : ciboulette
- Gwinegrenn : vinaigrette

BUHEZ AR SKOLAJ

Lewis

Ar Cross

D'ar yaou 20 a viz Here e oa Cross ar skolaj er cosec . Bugale ar skolaj o deus redet. Meur a brantad a zo : paotred 5vet, merc'hed 5vet, paotred 4re , merc'hed 4re. Ar 6vet o deus redet d'ar mintin hag ar 3de n'o deus ket redet . 1,5 km eo hirder ar Cross. Ar Cross a oa mat.

Actu.fr



Bleuenn

Koad Brekilien

Bet on bet d'ar c'hoad brekilien d'ar Meurzh 9 a viz Mae 2023.



mamenn : linternaute.com

Ar wezenn aour

An arouez eus an nevezadur eo. Mein bevez ez eus tro-dro evit dibennadiñ laeron da zemer an aour.



mammenn : bretagne35.com

Kador Merlin

Kador Merlin a zo ur fador ispisial : ar fador-mañ a sevens ar c'hoant eus an den a douch anezhi.



Melezour ar voutid

Araoz, boudig a veve e-barzh melezour ar voutid. Un deiz, un tabut a dazh etrezo peogwir ar femp c'hoar o deus lazhet an amourous eus an hini libanañ. An hini libanañ a lazhet he c'hoar evit adlakaat da vevañ he amourous.



Pierre, Maël

AR FILM COCO

Sellet hon eus ouzh ur film er gentel Spagnoleg.

Coco eo anv ar film se.

Sellet hon eus ouzh ar film se peogwir e labouromp war ar sevenadur meksikan.

Ar film se a bad 1e45.

E barzh ar film se e komzer deus ar musik hag ar «musik» a zo e barzh ar sevenadur meksikan.

Infos ouzhpenn!

- krouet e bet e 2017 gant Lee UNKRICH hag Adrian Molina.

- 139^{vet} film Disney eo ar film se.

- https://www.allocine.fr/film/fichefilm_gen_cfilm=206775.html



Pierre, Maël

Ar Valeadenn C'hlas

1) Petra eo ar Valeadenn c'hlas ?

-Ar Valeadenn C'hlas (evit ar **Green Week**) a zo ur gerzhadenn normal-tre met ur pal disheñvel eo : dastumañ al lastez evit ar blanedenn !! ☺

2) Pegoulz hon eus graet ?

-Graet hon eus se d'ar Mercher 10 a viz Mae d'ar mintin.

3) Peseurt skouer lastez hon eus kavet ?

Kavet on eus boutailhad, kanell, paletenn, pakaj.



Atersadenn

Anaëlle, Alwena, Aëlys

GOULENNOÙ ? :

- Plijout a ra deoc'h ar self ?
- Petra eo da danvez muiañ karet ?
- Plijout a ra dit bezañ e-barz ar skolaj ?
- Petra a blij dit e-barzh a skolaj ha petra ne blij ket dit ?
- Plijout a ra dit ar fichadennoù nevez ?

RESPONTOÙ :

Maël:

- 1) Etre-daou eo peogwir eo mat a-wechoù met fall eo a-wechoù ivez.
- 2) Ma danvez muiañ eo ar sport.
- 3) Ya, peogwir em eus kamaraded dreist.
- 4) Ne blij ket din an trepas met plijout a ra din an aergelc'h.
- 5) Ya mat eo met mankout a ra plas.

Pierre :

- 1) Nemet pa vez kebab ha tomatez .
- 2) Ma danvez muiañ karet eo sport ha teknologiezh.
- 3) Ne blij ket din ar skolaj.
- 4) Plijout a ra din ar porzh skol ha Mael met ne blij ket din ar gentel.
- 5) Mat eo met kalz a dud a zo bemdez.

BUHEZ AN HENTENN VREZHONEG

Anna

Raktres kontadennoù an Ankoù

E-pad ar bloavezh skrivet hon eus kontadennoù war an Ankoù.

1) Piv eo an Ankoù ?

An Ankoù a vez graet e brezhoneg eus ar marv, pe gentoc'h eus oberour ar marv, an hini a zegas ar marv d'an dud hag a gaver e meur a gontadenn.

Dastumet eo bet ar bras eus ar mojennoù diwar-benn an Ankoù e dibenn an XIXvet kantved gant Anatol ar Braz en e levr *La légende de la mort en Bretagne* embannet e 1893.

Hervez ar mojennoù e teu an Ankoù war e garigell da zastum an Anaon*. Pa glev un den 'wig ha wag' karr an Ankoù o wigourat* eo tost dezhañ e dermen, pe da unan kar dezhañ. Hag an hini a wel anezhañ a varv e-pad ar bloaz.

An ankoù a vez alies skeudennet en ur c'horf-eskern, pe evel un den kozh, blev hir ha gwenn gantañ, gant un tog hag ar c'hab du. Derc'hel a ra ur falc'h en e zorn, met gant al lanvenn en diavaez.



underworld956.skyrock.com pinterest.com

Geriaoueg :

- Anaon : l'ame des défunts
- GWIGOURAT : couiner, grincer

2) Ar raktres

Evit skrivañ ur gontadenn war an Ankoù ret eo bet araok lenn kontadennoù skrivet gant skolajidi all. Ha goude kroget hon eus.

Da gentañ graet hon eus strolladoù daou pe tri. Ret eo bet soñjal eus an istor dre vras, ober ur brouilhoñs. Goude skrivet eo bet tamm-ha-tamm. Ar penn kentañ, an divizoù hag ar fin, tout ze e pemzek linenn.

Peder c'hontadenn a zo bet er fin : *Buhez an Ankoù* skrivet gant Anna hag Abigail ; *Ar remed sekred* gant Bleuenn hag Aëlys ; *Ur gaouiad eo an Ankoù* skrivet gant Maël, Lewis ha Pierre hag *Ar vuhez skol* gant Anaëlle hag Alwena.

Lewis

enrolladenn kontadennoù an ankou

Tanguy Poisson (un animatour radio) a zo deuet er skolaj evit enrollañ kontadennoù hon eus skrivet.

Skrivet hon eus meur a gontadenn gant an Ankoù e barzh.

Goude hon eus enrollet er sal radio ar c'hontadennoù.

Enrollet hon eus evit Radio Kerne ha Radio Naoned.



Evit selaou ar c'hontadennoù :

<https://college-pierre-brossolette-bruz.ac-rennes.fr/spip.php?article396>

<https://www.radionaoned.bzh/br/category/atalierou-radio-naoned/>

AR REMED SEKRED

(Aëlys, Bleuenn)

Ur wech e oa, e 1827, Yann-Paolo gant e blac'h Rodell-aour, a oa o chom en ur gêr vihan. (Yann-Paolo a lavare : « me am eus rodell aour brav tre ! ») Met Rodell-aour a oa klañv tre.

Un noz, Yann-Paolo a glevas trouz, neuze kemer a reas ur voujienn. Dont a rae an trouz eus ar puñs. E-barzh ar puñs, ul levraoueg a oa. Kregiñ a reas Yann-Paolo da lenn ha kavout a reas ul levr gant ur remed sekred evit ober war dro tout ar c'hleñvejoù. « Se a zo evit Rodell-aour » a soñjas Yann-Paolo. E barzh al levr e oa skrivet pelec'h kavout ar remed sekred. Skrivet e oa : Koad ar Sonjoù. Just a walc'h, Koad ar sonjoù a oa just e kichen e di. Kerkent, mont a reas Yann-Paolo da Koad ar sonjoù ha kavout a reas ar remed sekred. Ur vamm-gozh a lavaras : « emañ o vont da sikour ac'hanout evit ober ar braoued. Ya, ma...

Gouzout a ran : Rodell-aour a zo klañv ha te 'teus c'hoant kas ar remed sekred da Rodell-aour ». Goude-se Yann-Paolo a zistroas d'ar gêr. Met Rodell-aour a lavaras : « Pouah, n'eo ket mat da remed !

- Ma ne vez ket evet ganit, te a varvo !

- N'eo ket mat ! Gwelloc'h eo din mervel eget evañ an dra-se ! »

Mervel a reas Rodell-aour. An Ankoù a zeuas hag a lavaras : « Evit pinijañ ac'hanout, te a varvo ivez ! »

Hag an Ankoù a lazhas Yann-Paolo .

FIN

Ar vuhez skol
(Alwena, Anaëlle)

Ur wech e oa Aminou ha Youyou gant o yar. E-barzh ti Youyou e oant .An daou zen se a oa o sellout ouzh film " Ar vuhez skol " gant pop-corn. Gourlammat a reas Aminou peogwir he doa klevet un trouz. Redek a reas gant o yar betek ar gegin hag lezel a reas Youyou e-unan .

- Petra a c'hoarvez ??

-An Ankou a zo a-dreñv ar prenestr !

Treiñ a reas kein Youyou ha lavarout a reas :

-Buhan buhan kerzhomp kuit !

Mont a reas an daou vignoned hag ar yar, kuit eus ar gêr, mont a rejoint betek ar skolaj. Lavarout a reas Youyou da Aminou :

-An Ankou a zo a dreñv deomp.

Met Aminou a oa bet bac'het e-barzh karrigell an Ankoù .

- Youyou deus da sikour ac'hanon !!!

Dizoloiñ a reas Youyou en doa gantañ dreist-gallout. Kerkent e treuzfurmas ar yar en ur dourvac'h. An-dourvac'h a zebras an Ankou. Hag Aminou a lammas e-barzh divrec'h Youyou.

-TRUGAREZ TRUGAREZ !!!

Goude e pignas an daou zen se war an dourvac'h hag aet kuit en ur vouskanañ.

-" Lala lala lala..."(Tri martolod)

FIN

Buhez an Ankoù

(Anna, Abigail)

Ur wech e oa an Ankoù. O tebriñ e oa gant e familh en e gastell.

-Bez jentil. A lâras e dad an Ael.

-Ya, bez evel don. A lâras e vreur an Tad Nedeleg.

-Bez drouk, aesoc'h eo er vuhez ! a lâras e vamm an diaoulez, Ret eo kempouez !

Re a dud jentil a zo e-barzh ar familh !

Ha setu e oa kollet an Ankoù etre an tu mat hag an tu fall.

Un deiz e oa o pourmen war ur pont evit mont en e bark dezhañ. Un den a oa dija e-barzh : Jean -Paul

- Ma fark din-me eo ! Kerzh kuit ! a huchas an Ankoù

- N'eo ket. Ma fark din-me eo, a lâras Jean-Paul, un den bihan met kozh.

- N'eo ket.

-Prou-ze neuze, kabuchon du.

-N'eo ket ur c'habuchon, ur c'habell eo korrigan.

-N'on ket ur c'horrigan ! Ha petra eo da anv ?

-Ma anv a zo an Ankoù ha c'hwi ?

-Jean-Paul Lazo g' Tredan eo ma anv. Ha c'hwi a zo war ma fark!

-Ur penn-peul out korrigan ! Ma fark eo !!

- TRAWALC'H !!!!! Ma fark din-me eo kerzh kuit ! a huchas Jean-Paul e kounnar.

- Mervel a rit a-benn nebeut Lazo g' Tredan !

Ha mont a reas kuit an Ankoù fuloret groñs.

E fin an deiz Jean-Paul a yeas en-dro en e di. Lâr a reas en e familh en doa gwelet un den anvet Ankoù, iskis e oa.

Diwezhatoc'h e-pad ar sizhun Jean-Paul a varvas abalamour d'an tredan. E c'herioù diwezañ a voe « An Ankoù an hini eo ».

E-pad an amzer-se an Ankoù a yeas da welout e vamm:

- Drouk on bremañ, mamm !

- Fier on ma mab. Ur prof am eus evidout: ur c'harrigell.

- Trugarez ! Plijout a ra din e drouz : wig-a-wag wi-a-wag

Ha setu kroget istor an Ankoù.

UR GAOUÏAD EO AN ANKOU

(Maël, Pierre, Lewis)

Ur wech e oa ur plac'h a oa seitek vloaz hag a oa o kannañ dilhad e-barzh ur stal kannerezh-dilhad.

Da hanternoz dre vras, klevout a reas un trouz evel ma vefe serret un nor er maez , ha da c'houde e klevas trouzioù pazioù o tont e-barzh ar stal kannerezh-dilhad. Sellout a reas piv a oa met... ne oa ket ur soñj mat peogwir an Ankoù a oa.

« - Na lazhit ket ac'hanon !

- Digarez met ar choaz a zo bet graet ganin ! »

Sevel a reas e falc'h ha lazhañ a reas Lana POIRRIET (anv ar plac'h e oa). Mont a reas en dro e-barzh e gamionetenn gant korf ar plac'h.

Peder eurvezh goude, e barzh toull an Ankoù e oant.

An Ankoù a zo aet kuit evit lazhañ tudoù all hag e pad ar prantad-mañ, un Ael a zo deuet da adveviñ a plac'h.

Tri bloavezh goude, maleüruzament e oa bet tapet ur c'hrign-bev gant ar paour kaezh plac'h. Ur miz goude e varvas ar plac'h. An Ankoù a deuas e barzh kambre ospital ar plac'h evit ober ur marc'had...

- « Ur marc'had am eus da ginnig dit.

-Petra eo ? »

Goude un ehanig, asantiñ a reas ar plac'h. Diwezhatoc'h e oa war e droad ar plac'h evit addegas ar paour kaezh Ael d'an Ankoù.

Peogwir ya... se e oa ar marc'had a oa bet graet gant Lana hag an Ankoù : lazhañ an ael !!! Maleüruzament evit an Ael ne oa ket barrek evit an emgann... An Ael a zo bet addegaset d'an Ankoù hag a lazhas anezhañ.

Met ur gaouiad e oa an Ankoù ha lazhañ a reas ar paour kaezh Lana en dro e plas leuskel anezhi bev...

FIN

Priz ar Yaouankiz 2023

Digoradur

Da gentañ hon eus lennet an tri levr : « Adkavout he roud », « Gwenn pemzek vloaz » ha « Konstantinopolis ». Da c'houde, deuet eo Tangi Poisson, ur c'hazetenner, da sevel un abadenn radio ganeomp. Graet hon eus strolladoù 5 evit pep levr hag ur strollad 2 evit an animatourezed.

Eliette, Eloane

Animatourezed

Alannah, Altaïr

Degemer mat d'an holl war radio Kerne/Naoned ni zo ar c'hlasad 4^e 3^e brezhonegerien eus skolaj Pierre Brossolette e Bruz. Hiziv e lakimp ar gomz war levrioù priz ar yaouankiz. Da gentañ e vo komzet diwar al levr « Adkavout he roud » gant Louis, Ewen, Andeol, Marceau ha Marig. Marig ha Louis a brezanto al levr, burutellet e vo al levr gant Marceau, lennet e vo ul lodenn gant Andeol ha graet e vo un atersadenn faos gant Ewen : Deomp dezhi !!!

ADKAVOUT HE ROUD

Al levr « Adkavout he roud » a zo bet skrivet gant Yann Fañch Jacq.

Embannet eo bet e miz Here 2022 e Brest.

Keit Vimp Bev (KVB) eo an ti-embann.

Koust a ra 9€.

Ul levr polis eo.

War ar bajenn-golo ez eus ur c'hi er c'hoad.

- Bremañ emañ o vont da lenn ar pevare golo evit prezantiñ al levr :

« Ur gejadenn, dre zegouezh. Ton ur vouezh a zegas war wel en-dro an amzer gozh. Ha setu Juluan war roudoù an amzer dremenet, en un enklask pell da vezañ aes. Dre chañs e c'hell kontañ war Berc'hed... ha Toutou Krazig »

Louis, Marig

- Emaon o vont da lenn ul lodenn deus al levr :

« Krakvevañ am eus graet. Lonket buan an holl wenneien lakaet a-gostez. D'ar poent-se eo pellaet Laura ouzhin ? A ! Laura !!! Laura ! ... »

- Da c'houde emañ o vont da vurutelliñ al levr :

Plijet on bet gant al levr dre vras, interesant ha plijus eo an istor. Domaj eo peogwir e tremen ar fin re vuan. Un tamm diaes eo da gompren ar fin. Met da ma soñj « Adkavout he roud » eo ul levr mat evit lenn e brezhoneg.

- Bremañ emañ o vont da brezantiñ an atersadenn gant Juluan :

Kazetenner : Juluan spontet out bet gant al lazher ?

Juluan : Ya peogwir e soñje din e oa un den all, ne oa ket se, ret e oa kaout un tamm spered evit kompren

Kazetenner : Aon az peus bet ?

Juluan : ya peogwir am boa aon da vezañ lazhet

Kazetenner : Penaos e ya bremañ ?

Juluan : Bremañ e vevan mat gant Berc'hed

Marceau, Andéol, Ewen

Animatourezed

// Trugarez dedennus e oa.

Gant an eil strollad e vo komzet diwar-benn al levr «*Gwenn 15 vloaz*». Tinaig a brezanto al levr, Ian a vurutello anezhañ. C'hoariet e vo un atersadenn faos gant Eline, Molly ha Pauline. Krogomp gant Tinaig.

Demat tudoù !

Komzet e vo eus ul levr dedennus kenañ... GWENN PEMZEK VLOAZ !

Skrevet eo bet gant Mai Ewen, e 2022 hag embannet gant Keit Vimp Bev.

Da gentañ komzomp eus ar pajenn golo ; diskouez a ra ur plac'h azezet, o sellout ouzh ar moRRRR, seblant a ra soñjus ha trist...

- Setu an diverradenn :

« Poan he deus *Gwenn* en he familh, gant he zud war poent dispartiañ dre'n abeg un tad deuet da vezañ drouk. Skoazelet eo gant he mignonez Janis, he mamm-gozh, ha karantez he c'hoar vihan. Un diviz kreñv a zalc'h anezhi en he from ivez. Gant ma c'halla kenderc'hel gant he hent. »

Molly

- Demat , hiziv vo aterset Janis ha *Gwenn*

ATERSADENN GWENN :

Demat *Gwenn*, piv out e-barzh al levr ?

- Demat, an dudenn bennañ on. Pemzek vloaz on hag en eilvet klas emañ.

Petra ne ya ket e-barz da vuhez ?

-Ma zad a sko ouzh ma mamm evit un dra tremenet 3 vloaz zo e Pertuis ha diaes eo evidon , hag evit ma c'hoar vihan Lizig, ivez. Pa'n doa lavaret tadig en doa kavet ur vicher all, e Douai, hag en doa c'hoant dilojañ, aon m'eus bet e vefe dispartiet ma zud.

Petra eo da relasion gant da vamm gozh ?

- Tost-tre on ouzh ma mamm-gozh Soaz, mamm ma zad.

ATERSADENN JANIS :

- Diouzhtu atersañ a rin Janis
- Demat Janis. Piv out ?
- Demat Tinaig, me zo Janis, mignonez gwellañ Gwenn.
- Penaos e vevez ar gouennelouriezh ?
- Diaez eo bemdez, met gant Gwenn ha ma zud, ma vuhez a zo plijusoc'h ha gwelloc'h bemdez, neuze n'eo ket grevus, gant ma mignonez gwellañ ha ma familh, eürus on bemdez.
- Kavet 'feus da dud e Brazil ?
- Ur goulenn mat eo, 'm eus ket kavet met klask a ran war internet pe war an ospital lec'h me zo ganet.
- Mat eo, trugarez Janis !
- Mann ebet !

Tinaig, Pauline, Eline

BURUTELLIÑ

Al levr zo mat peogwir eo an istor sklaer.

Ar vuhez zo diaes evit Gwenn peogwir an tad a sko ar vamm peogwir ar vamm he deus bet un avañtur gant ur paotr all

- Lennet e vo pajenn kentañ al levr :

« Skoet en deus adarre.

Klevet 'm eus anezhi o huanadiñ, o c'houlenn «truez» pe «pardon» hag o tifronkañ. Penaos e c'hall-hi goulenn gantañ he digareziñ ?

Skeiñ a ra ganti. Ne glevan ket alies an taolioù o kouezhañ, goût a ra skeiñ didrouz pe dost, met ne c'hell ket-hi daoust d'he bolontez derc'hel atav didrouz he c'hlemmoù.

Kuzhet ma fenn dindan al liñserioù, stardet-mort ma c'harvanoù, dantañ 'ran ma muzelloù »

Ilan

[Animatourezed](#)

// Trugarez, dedennus-kenañ e oa. Gant ar strollad diwezhañ e vo komzet eus al levr « Konstantinopolis ». Kinniget e vo al levr gant Julie. Eliette hag Eloane a lenno ul lodenn deusoutañ. Zacharie a lavaro e soñj diwar al levr. Kristen a aterso Zacharie.

Konstantinopolis

- Demat emañ o vont da brezantiñ al levr « Konstantinopolis » :

Konstantinopolis eo titl al levr. Skrivet eo bet gant Clyde Dlugy-Belmont. Embannet eo bet e miz Here 2022 e ti embann Keit Vimp Bev. Ul levr istorel ha faltazi eo.

- Bremañ emañ o vont da zisplegañ an istor gant ar pevare golo :

« Penaos dresañ ur fazi na c'heller ket dresañ ?

Penaos ober peoc'h gantañ e-unan, ha lakaat an amzer dremenet a-dreñv dezhañ ?

Evit respont d'ar goulennoù-se e ranko Hoel, mab ur marc'heg eus Kommanna ober ur veaj hir a gaso anezhañ betek kêr vurzhuduzañ ar bed da vare ar Grennamzer. »

Julie

Emaomp o vont da lenn penn-kentañ al levr :

« 1 -Gwall

Ur vrumenn vras a oa kouezhet. En va sav edon oc'h ober ged. Komañset e oa pep tra gant al latarse, gleb, gouest d'en em silañ e pep lec'h, da lakaat ar yenijenn da skornañ kement tamm eus korf an nen. O klask kaout tomm edon, prederiet gant va c'hefridi, o vale a-gleiz hag a-zehoù, hep gwelet krec'h Menez Are edo dirazon evelato, kuzhet gant ar vrumenn dev ha louet a c'holoe ar bed. O klask delc'her va evezh, abaoe peder eurvezh edon en va sav er-maez oc'h ober ged. »

Eloane, Eliette

ATERSADENN :

Evit echuiñ emañ o vont da atersiñ Zacharie diwar-benn al levr :

Plijet out bet gant al levr ? Perak ?

Kavet em eus mat lusk an istor. Kalz suspens a zo hag e plij din al levrioù evel-se.

Aes e oa da lenn ?

Ne oa ket hir al levr, neuze simpl eo lenn anezhañ met e brezhoneg eo hag ez eus kalz gerioù diaes. Diaes eo da gompren.

Piv eo da dudenn muiañ karet ?

An dudenn Hoel a zo dedennus hag e istor a zo mat, met ne blij ket din e demz-spered. An tudennoù all n'int ket fall met ne blijont ket din kalz. Hoel eo ma zudenn muiañ-karet memestra.

Neuze petra a gavez fall gant e demz-spered ?

Hoel eo an tamm emgar ha ne blij ket din an tudennoù evel-se.

Te 'teus c'hoant da lenn levrioù all e brezhoneg ?

Ket peogwir eo diaes da gompren, hag e galleg eo gwelloc'h.

Zacharie, Kristen

Animatourezed

// Trugarez vras, dedennus e oa. Trugarez d'ar c'hlasad, da dTangi, ha d'an Aotroù Illien. Ni oa Alannah hag Altaïr war Radio Kerne/Naoned. Kenavo, devezh mat deoc'h !

Gerioù kuzhet geriaoueg ar gazetenn

Klask ar 12 ger kuzhet !

P M Q M F Ê U D Y X S Ô R J C
E B B D K P İ Z È C Ù L U O E
N B M X Ë Ù T P Ë Î A H C P Î
N N E T E Z A K K E L E I E R
A G E U O A I R E G À K S Î G
D T A O L E N N Q T E Z Ê B Î
S C B W O F O F G R Ë O I B İ
K Ê Ê G G Y D Ç D E B U Y R R
R J Î À N S Q H D É Z B Z À A
I É W M N À À U A B F K R T T
D B S Ç E V D L I C K Ù U C E
Ç H Ô G J M P D L Û F W B W R
N N E D A L E T U R U B R E S
S H E I P Q À K E X S K I K A
J Î M Ô K G V Z T R F B K R D
İ K I U G J U T N V Q A E C E
O S Y Ù H U E V Z Y H L N F N
Y O P R U G C Z O Y P S N P N
T Ë O K J I T O G D H J U Z O
Û À H Î À Û Z X T E M B A N N

KAZETENN
ATERSADENN
RUBRIKENN
PAJENNGOLO

TAOLENN
PENNADSKRID
TEULIAD
KELEIER

REKIPE
GERIAOUEG
EMBANN
BURUTELADENN